



54

# REGLÉN

## CONDUIJOU FAL AR BED :

### MALEUR D'AN NEB O EUILLO.

*Var eun ton neve.*

Quis dabit capiti meo aquam et oculis  
meis fontem lacrymarum?

Piou a roio dour d'am pen, va deou-  
lagad deou feunten a saerou, evid  
goela d'am c'hrimou ?

ABITANTET, men o suppli,  
Deut oll dar bebiortec,  
Quement a entent ar steudi  
Deus all langaj brezonec,  
Ag enon c'hui gavo merqet  
Maleuriou ar bed ingrat,  
Ar re vo gante liammet  
A raï mil goel galonat.

Ar voul rond deus ar bed furi  
Na zez qet da vont en dro,  
Aneb ne gombatint outi  
A dra sur oa marc,  
Qar e vissou so gouarnet  
Gand eun ners inqomprenabl,  
Divar ruzou an droug speret  
Ag e bompou essecrapl.

Var se e cafer da gompren,  
A vianig e sevel,  
Ar goel vue ag e goalen  
A vo renet er getel;  
Ne raio qet a reprochou  
Da ini en eb fesson  
Met expliqa an droug poinchou  
Ag o fos ompinion.

Den ne raï fe var ar c'homsou  
Na mimprisa ar reglen  
Nemet an droug santimanchou  
Galon ar respet humen,  
Qar ar pès a veler bemde  
Var blad ar bed astennet  
E oar sur int ar virione,  
Ne dal qet dislavaret.

Sellet qenta an ouvrier  
 Nos de en qorf e rochet,  
 E labourad var e vicher,  
 Na sul na goel ne respet,  
 Dilun, de oel bras ar Verc'hes,  
 Er goelfet e labourat,  
 Ar rest bete fin ar sunves  
 E chommo meo ar horfad.

Dont a raï greg an den cruel,  
 En so crog en e veren :  
 Var e diou-vrec'h so deou vugel  
 A pevar en e c'hichen ;  
 Goulen a raï eun tam arc'hant  
 Da soulaji ar galon :  
 Sorti alese prontamant,  
 A respont an direson.

Er c'hoste-all eun darn ar merc'het  
 O deus qen ferm eur creden  
 Ag eun imor qen qaledet  
 Na ne blego birfiqen,  
 Da zisput ar blas e chomfont  
 Memeus var ar gaou patant,  
 A mil sosis a laqafont  
 Da c'houarn o santimant.

Rag se qent sonjal demeï  
 Demp da len qayer ar boan  
 A non pas dont da angaji  
 Or bneou re vuan :  
 Ma n'en de qet d'or zantimant  
 Soufr ar c'haloni bepret  
 Perag tra qemer mouamant  
 Victim orolaj ar bed ?

En tal se e m'ân n'usulier  
 A so deus en em bressi  
 Da sinifia e verer  
 Ag e teui d'er glac'hari,

Plas en deoa d'en em sevel  
 Gand amser en onestis  
 Siquitet e var nao bnguel,  
 Ar c'hossa er c'hateqis.

Usulier cri, qalon garo,  
 Piou a c'heus da sicoita,  
 Distro aman a te velo  
 Archedi da vab ena  
 A oa bed e ofern neve,  
 Deac'h so eis de tremenet,  
 Ne oa gir a fin e vue  
 Pa oa deus tol ar banqet.

C'hoas e velfer marc'hadourien  
 E mesq o marc'hadoures,  
 E laisi ta mil droublie  
 Da gondui trompleres,  
 Pa ellont.coulma o neuden  
 A formi an tromplezon  
 Neuse vo poqet dar veren,  
 Qontant an intancion.

A ma soujfant en qemen-se  
 Dont evid gonit netra  
 Da gol grassou mad o ene  
 A bers o heur divea,  
 Ranqout coitad o sepultur  
 A chom er bed adare,  
 Crial fos poes a fos musur,  
 Sponta re vo en bue.

Amor domini Dei non amata in mundo.  
 Quarante Doue an Autrou n'en de qet  
 qaret er bed.

Al labourer a vo yve  
 En e barg e labourad,  
 E vlasfemi ano Done  
 Qen a rosto e sillad

Abalamour deun tam tourmant  
 A so bet en em gavet  
 Ne all qet heuil e santimant  
 Evel man deoa sonjet.

Blasfemator, yde monstrus,  
 A ne finissi qet hoas?  
 Deus da visita corf Jesus  
 So astennet var ar groas,  
 E dreid ag e zeou-arnigon  
 Dioñti a so staget  
 A te hoas gant ta blasfemou  
 A sco varne arajet.

Neuse vo eur rum noteret  
 E ramplissa contradou,  
 Anter, veo o memor troublet,  
 Ag e lessint spegennou :  
 Fotif e fellien an noter  
 Regtal e savo prosses,  
 Qent plega en em reviner  
 Ag en em laqat dies.

Conductoret ar pluennou  
 Examinet o qayer,  
 Finissa rai ar blavesion  
 So e ren en o qever  
 Ag eun deves e vo venjans,  
 Credit ardi en goirriou  
 An den re frang e gonsians  
 En deo goel bunision.

Goude e man ar justisçou  
 Var moes ar bobl arretet  
 Evit barni an aferou  
 Deus al lesen ordrenet  
 Tri pevar dest fos a glasqer,  
 Venji a vo gret bepret  
 Pe ma ne ve gallet ober  
 Evid hoant ne vanqo qet.

Dogtoret ar justis humen,  
 Sonjit mad en o qalon  
 Enteroji ferm al lesen  
 Qent barni en neb fesson :  
 Ma sujfec'h deus poes an arhant  
 Bue eun den re abred  
 Hoi ve condaonet prontamant  
 Dan tourmanchou diremet.

Ag ar superior bompus  
 A gret d'ar goel deod monden,  
 So e hassommi corf Jesus  
 Dindan dreit e vourevien ;  
 Dont a raio e fongsion  
 Evel muntrou pressipis  
 Da blonji ar gomunion  
 En fons eur horfat malis.

Ministret an doctrin sinçer  
 En o ti e red ar goad,  
 Dispen a ra corf or Salver  
 Pa gredit eur goel deodad,  
 Sonjit hoi so qer goas muntret  
 Mar gassantit evelte  
 Qerfal e re dalc'h ar sier  
 Evel a re dol ene.

E heuil exempl ar goel deodou  
 E c'hofanser mab Doue  
 Qar eun nombr bras a valosiou  
 A leqeont da vale,  
 An union en e repos  
 A so e croas et gante  
 Ar veleien ag o faros  
 Laqat malis entree.

Dar priejou e lavarfont :  
 Ar reont a so minionet  
 Ag ar bras ane pa glevont  
 Qer qent a so coleret

Devodet en ide gante  
A dalc'h imor dar homsou  
Gant ma vo anvet dirae  
Enont pilier an dansou.

Tragidien ar goel deodou  
A so eur gontantamant  
Ne al qet repos o ginou  
Enni so eun tan ardant :  
Comsit oute dar mintiniou  
Pa sigor o deoulagat  
E lavarint goel deodou  
Arog goisqa o diliat.

Men so bed gante reclamet  
Abalamour ma tansen,  
Qemen-se a ra ar sujet  
Ma tisclerrian eur reglen  
Qar ar re n'a qet dan dansou  
A credi eint tud prudant  
Pa vent e hada droug comsou  
Se nen de qet eur panjant.

Jesus filii David , miserere mei !  
Jesus mab da Zavid , o pet true ousin.

Clevid resita an ano  
Dre fos malissou blamet  
En qador ar pron en eur vro  
Eb na reson na sujet ,  
Scrifet e *Olier Merc'er*  
Var gayerou e ganton ,  
Ag an etat a menuzer  
Eo e occupacion.

Er vro-se pa ganer soniou  
A ne vent qet bed cievet ,  
Prest e ve savet murmurou  
Neus fors penos e vent gret ,

Mar zo trons a brud er c'hartier  
A vo lavaret abret :  
Piou so qos nemet ar *Merc'er* ,  
Pe vo gour pe ne vo qet.

Gousquode pa ran eur chanson  
Men all rei preuvennou scler  
Sur em be eur sujet goirion  
Arog qomans e ober ,  
Credi a eller va soniou ,  
Ag en ker a var ar mes ,  
Qar biqen tars an droug qomson  
Ne buplio dre va moes.

Med pa goms ar goel deod forban  
Men vo den fal tremenet ,  
A var e suit e unan  
So peb mad da lavaret ,  
Lagad eun al tasset mibin  
A gonto dec'h bras meurbed ;  
En e ini eur marb melin ,  
Deus ennes ne gomso qet.

Var se fagoret al lesen  
E red din avertissa  
Nompas blami an danserien  
Rum da rum er memes tra ,  
Qar o santimant qouls a c'hoi  
Qa gret a beb sort danve ,  
Ne int qet tout ini da ini  
Labeet a fallente.

Proui ran e ren an dansou  
Triseg vla so tremenet ,  
A direproch va c'hamejou  
En qement ma meus marchet :  
Ar re lavar em be merqou  
Da zongen ingratiri  
Dont da zisqoel ar preuvennou  
Em presanc men o difi.

Var va lerc'h an dogtrin gristen  
 Separet deus trous ar bed ,  
 Eun dreit ouarn en e c'hichen  
 A c'hoas ne areto qet,  
 Goude barni an danserien  
 Qaji ene on condaonet  
 Sacramant an urs souveren  
 So gaad ar vis attaqet.

Neuse vo eur vanden fumel  
 E gas ar goel deodou  
 Revech d'e o bue santel  
 Pa voint e c'hober qalmou ,  
 A goude e vo reprochet  
 Bete ti an autrou mer  
 O droug santeles abimet ,  
 Lass o brosiou so re ver.

Den na gle en em songeal  
 Na credi re d'e furnes  
 Da lavaret e didamal ,  
 Te oa yve ma qarjes ,  
 Qar evid bea ar vue  
 Ned a dorfet criminal ,  
 Siouas , e souliet an ene  
 Gant ar pec'het capital.

Eur jaqobin , eun devodes,  
 En em laqai er brudanç  
 An danser ag an danseres  
 A laqaint en mimprisanç ;  
 Piou a dec'h deus ar bed mastrouil  
 Pa e ar re-se souliet ,  
 Ne qet ennes e an ourgouil  
 A so qenta difennet.

Urzou sacr so da gourija  
 Humblamant an danserien ,  
 Met nompas dont da mimprisa,  
 Ar gristenach a zifen ,

Goude testum ar bruviesou  
 Tout assambles da repos ,  
 Mar be daonet nombr an dansou  
 E vo frang ar barados.

Les da vimpris , goel deod inpi ,  
 Deoulin aman aerouan ,  
 Sel ase e oar e formi  
 Chapel ven da verc'h vian ,  
 A oa dec'h en eul leur neve ,  
 Varc'hoas e hai en e be ,  
 Irrie e rent qont e bue  
 Dirag redemptor an e.

Sperabamus Deo nostro ; omnes morimur.  
 Esperomp en on Doue , red e souf ar maro.

C'hoi , merc'het devot d'ar Verc'hes,  
 A glasg ar religion ,  
 En couent Qalver Montroules  
 E man ar hanal goirion ,  
 Ennon gant eun alc'hoer santel  
 E fermet an dorjou ,  
 Ne al qet antren moes cruel  
 Malis fos ar goel deodou.

Penitantet , an oreson  
 Imprimet en leor ar fe  
 So fontet o religion  
 Er veret var ar vein be ,  
 Dre ar maro e aretet  
 O memoariou ordinal ,  
 Nan din qet nemeur occupet  
 Gand ar re ya da zansal.

Nemet ar fos religius  
 En ourgouil e abimou ,  
 A gret bea breur da Jesus  
 En creis ar vaniteou ,

Ar gloar sq dan Tad eternel  
Qonservet d'e fantasi ,  
A pa laer e densor santel  
E ranqo restitui.

Posomp en creis an debochou  
Or c'halon var e deoulin ,  
Da grial ar goel memoariou  
En lesen or Mest divin ;  
Mar goelont graç ar vertuïou  
Scler goel evit na reomp  
E lec'h credi goel deodadou  
Pedi Doue evidomp.

Tout on deus lec'h da gas address  
Bemde gand devotion  
Dirag Jesus ag ar Verc'hes  
A goulen teir goech pardon ,  
Ma c'hoptenimp o ajistans  
Var ar maro pirillius  
A dre o graç , ar jouissans  
En eternite joaius.

AMEN.



# POLARDIG A MARI GABESEN, DEUS A KEREVER-BRETON.

*Var eun ton danç Paribolen.*

CHOM a ran var eur basen  
Eur momant aset ;  
Ganen eur baribolen ,  
Tut yeouanc , selaouet ,  
So composet a neve  
Er bla-man da zansal ,  
Ag ar blavesiou goude ,  
Mar c'hoantaït fringal.

Eur mignon din eun deves  
En deus bed anonset  
M'en boa choaset eur vestres  
A ganti so tromplet ,  
Met pa e deus va bourdet  
Neus qet da rebeli  
Eur frajen deus ar sujet  
So red da gomposi.

Seti ase ar breuven  
Var eun tam paper sec'h  
Men e Polardig bian  
A oa disonet deac'h ,  
A pa veli va zroyou  
Te hoarso em sujet ,  
Goud a ri deus ar c'homzou  
Gand piou e vin tapet.

Ar plac'h-se a oa planqen  
E fesson da velet ,  
Anvet Mari Gabesen  
Gand eman en secret ,  
Ag e deus eul lieten  
Varnean coulmet mad  
Ne qet vid en diseren ,  
Ag en pot diliqad.

Bed int eun eubeut amser  
Deus en em freqanti ;  
Pa souje dean re scler  
E oa sur anei ,  
E res eun eubend troiou  
Vid e disoblija ,  
Med y a bleg e sonjou  
Ne deu qet da facha.

Goude en lein eur pardon  
E deus bed lavaret :  
Men a beo , va mignon ,  
Em ber mar ben leset ,  
Evid en digemeret  
Ag ober outan stad  
Troad eul lour e deus laqet  
En fons e scudellad.

Pa oa deut ar bonbonig  
 A zivil deus e loa  
 E oa savet eur meusig  
 Ag eun drous ar brassa,  
 Qar ar plac'h a lavare  
 Dre ma c'he da ober :  
 Men ya da vala cafe  
 En scul va servijer.

Nen de qet eun dro secret  
 Ones en deoa gret,  
 Ar re a oa e velet  
 Nen daint qet da glevet,  
 Ennes e meur a dachen  
 A vo sonj anean,  
 Troiou Mari Gabesen  
 A chomo stag outan.

E-hunan en deus laqet  
 Ober ar vatiel,  
 E droiou a so goelet  
 Ne servij qet tevel,  
 Bea e pot diliqat,  
 Dre se e istimet,  
 E avanson ene bad  
 Ne qet diminue.

Ar plac'h-se a oa qontet  
 Evit eun dra neant,  
 A breman pa so goelet  
 E scler e santimant,

E mesq an assambleou  
 E eun tam istimet  
 A freqantet avijou  
 Deus a beurs ar botret,

Na deuet qet, tud yaouanq,  
 D'en em estimout re  
 Qar ar bed-man a so franq,  
 Credit ardi da se,  
 Ac a laqa e miser  
 Lod ar fortunioù mad  
 Ag ober da re dister  
 Euil ar re diliqat.

An ini form ar suivant  
 Ya en qomson scler,  
 Pa oa peet en arc'hant  
 Arog mont d'e ober  
 En deus-si reglet buan  
 A scrifet eb apel,  
 Tostic da Roscoat Morvan,  
 En eur velin avel.

Polardig a re sonjou  
 En qrec'hen ar Men goen,  
 Eun dorn var fons e vragou  
 Eun al var lein e ben.  
 Pa finisser da scrifa  
 En deus bed lavaret :  
 Men n'em bo qen ar sort-ma  
 Deus a beurs ar merc'het.

FIN.